

N'ankouait ket e raer ouzhpenn ankouaat

Dernière mise à jour : 09-06-2008

Penaos treiñ oublier e brezhoneg ?

Anavezañ a rit, evel-just, ar verboù ankouaat, ankounac'haat pe disoñjal a raer gante e brezhoneg, diouzh ar c'hornad peurvuiañ, dres evel gant oublier e galleg :

Disoñjet am eus e anv.

Ankouaet en deus e valizenn er bus.

Ankounac'haat a ra atav ar pezh en devez d'ober !

Ankouaet 'feus tapan arc'hant en ti-bank.

Ha me 'oar-me...

Gallout a raer delc'hen d'ober e-giz-se ha mat pell zo, peogwir eo brezhoneg reizh... Ha goût a rit avat zo doareoù all, kuit d'ober bep taol gant ar memes gerioù ha kement ha diskouez ez oc'h ket tud disket ?

Ma 'peus ankouaet ho malizenn er bus, evel zo meneget uheloc'h, pe e forzh pesort degouezh er c'hiz-se, e c'hallit lâret ivez :

Chomet eo ma malizenn war ma lerc'h er bus.

Lezet en deus tout e arc'hant war e lerc'h er gêr.

Pa ne teu ket da soñj deoc'h deus un dra, un anv lakomp (na pegen kaus e c'hall bezañ !), hag a anavezit mat-tre koulskoude, n'ankouait ket lâret :

Lonket eo ganin !

Aet eo diwar ma spered !

Setu, tudoù, na zisoñjit ket silañ tannoù traoù mod-se e-barzh ar gaoz ur wech an amzer. Sylvain Botrel